



Skrivadenn an Dro e brezhoneg e Brest



D'an 19 a viz Meurzh, 100 devezh a-raok ma vefe loc'het Tro-Frañs eus Brest, 16 parrez e Breizh o deus kinniget da 5900 skoliad-ez kemer perzh er skrivadenn « Tro Bro-Leon ».

Ar skrivadenn-se 'zo bet kinniget gant Rannvro Breizh hag aozet e 17 skol Diwan ha divyezhek disheñvel. 311 skoliad-ez o deus kemeret perzh enni.

Da 10eur e Brest eo bet kroget gant ar skrivadenn er skol Diwan Kerango :

« Dibenn-sizhun marc'h-houarn e Penn-ar-Bed. Dindan an heol e Breizh e oa bet dalc'het redadegoù marc'h houarn en dibenn-sizhun-mañ (...) Aet eo ar maout gant Erwan Lagadeg, 26 vloaz, eus skipailh Rederien Bro-Dreger » (arroud eus ar skrivadenn, tennet eus ar media enlinenn Bremaik).

Ur skrivadenn a zo bet aozet e skol Château d'eau Gouenoù ivez.

Pedet 'vo ar c'hampioned evit un tennad eus Tro Frañs.

